


III- Ar Stadoù nevez didrevadennet


A- Kudennoù politikel en Aod an Olifant



- 1- E peseurt Stadoù emañ o chom ar bobl Senoufo ?
- 2- Piv he deus savet harzoù Aod an Olifant ?
- 3- Peseurt liamm zo etre kudennoù politikel Aod an Olifant hiziv hag an trevadenniñ ?

- E-kerzh 33 bloaz eo renet Aod an Olifant gant an diktatour Félix Houphouët-Boigny gant skoazell Frañs. Stank e chom al liammoù ekonomikel (Kakao, kafe...) ha politikel. (“françafrique”)
- Abaoe 2000 zo trubuilhoù bras en Aod an Olifant etre pobloù ar Su (pinvidikoc’h ha katolik) ha pobloù an norzh. (paouroc’h ha muzulman)
- E 2004 e rank ar Frañsizien tec’hel kuit eus ar vro gant ma kresk an enebiezh etre Su ar Stad ha Frañs.
- Da heul an dilennadegoù e 2004 e tarzh emsavadegoù e pep lec’h. Nac’hañ a ra Laurent Gbagbo (Krou) bezañ kollet an dilennadegoù a enep Alassane Ouattara. (Eus an Norzh)
- E 2011 eo harzet Gbagbo ha kaset dirak lez varn etrevroadel e Den Haag. (Izel Vroioù)

B- An diktatouriezh



Januar 1960 Neue Leute

Tresadenn flemmus graet gant Fritz Berendht e 1960

- 1- Displegit an dresadenn flemmus-mañ

C- Kudenn an dle




D'ar 26 a viz Gouere 2012 eo bet degemeret prezidant Aod an Olifant Alassane Ouattara gant François Hollande evit nullañ dle e Stad e-keñver Frañs.

Disklêriet en deus dirak ar journalisted : « Aotrou prezidant, c'hoant 'm eus trugarekaat ac'hanoc'h da vezañ asantet nullañ dle Aod an Olifant a oa 3 miliard a euroioù, servijout a raio an arc'hant-se evit diorren an deskadurezh, ar yec'hed ha modernaat ar maezioù hag ar c'hêrioù, an treuzdougen. »

1- Perak he doa Aod an Olifant un dle e-keñver Frañs?

2- Da betra servijo an arc'hant?

E- Diaesterioù ekonomikel



Priz an ezporzhiadurioù etre 1950 ha 1972

1- Peseurt kudenn diazez evit Afrika vez lakaet war-wel gant ar grafik-mañ ?